


Istor Breiz



Contouring

HERRI CAOUISSIN

Istor
Breiz
Coutouig

CB
891.
688
CAO

Sheudennet
gant

Félix JOBBÉ-DUVAL

Va mignoned,


...En noz tremen, em eus graet eun hunvre burzudus ...Graet em eus eun droiad e Breiz gwechall goz.

Mammig he devoa roet eur pok d'in. Serri a raen va daoulagad, ha setu ma klevan eur zonerez dudies. Ha petra a welan?

En eur zal vras, soudarded renket brao, en dro d'eur roue azezet war eun trôn alaouret. En e gichen, eur briñsez koant a vousec'hoarze. Eur marc'heg a dosta ouzin hag a lavar d'in :

— Gwelet a res, paotrig! emaut aman e Enez Vreiz, e kastell Arzur Veur. An hini a zo o seni gant an delenn eo ar Barz Marzin. Kana a ra meuleudi ar Vretoned. Hag an holl soudarded-se eo Marc'heien an Daol-Grenn...

Estlammet oun!...



Fjabbé duval

...Ha souden, setu me en em gavet etouez
eur bern tud, o tiredek wardu ar mor. Eññ
den koz a grog em dorn :

— Deus ganen, bihanig. Allaz, emezan
en eur ouela, kannet omp gant ar Zaozon, ni
ar Vretoned. Kaset omp kuit eus hor bro.

Ha setu ni bodet war eul lestr... Goude
eur veaj hir war vor, e welomp eun douar
nevez :

— Chomomp amañ, a lavar eur manac'h ;
Arvorig eo; hor bro nevez e vezo. Ni hen
añvo Breiz vihan, e sonj eus ar vro hon eus
kollet.



Met piou eo ar c'hakouz-se hag a dosta ouzin, o c'houlenn diganen e zikour da dreuzi ar ster? Aon bras em eus 'razan, ha re vihan oun evit rei sikour d'ezañ.

A drugarez Doue, setu eur marc'heg : chom a ra a-sav ; diskenn a ra diwar e varc'h. Ha setu ma kemer ar paourkez kakouz etre e zivrec'h, evit e gas en tu all d'ar ster.

Neuze, va daoulagad a well eun dra vurzudus : ar c'hakouz a deu da veza gwennkann evel an erc'h, ha lugernus evel an heol : ar marc'heg e galon aour a gouez d'an daoulin :

— Aotrou ! aotrou ! emezan.

An hini a oa kakouz bremaik a respont d'ezañ :

— Judikael, Roue ar Vretoned, an Aotrou Krist a ro d'it e vennoz evit da garantez vras...

O klevet an ano-se ez an me ivez d'an daoulin.



Pa savan va fenn, eo noz teñval. Klevet a ran ar mor o krozal, hag e welan daou zen war varc'h o c'haloupat pennfollet, er mor dirollet.

Eur pesketaer koz a lavar d'in eo an daou-se ar Roue Gralon ha sant Gwenole. Tec'hout a reont eus Ker-Is beuzet.

Ahez, merc'h ar Roue a oa eur plac'h fallakr, ha ne selaoue ket aliou fur he zad he deus digoret sklujou Ker-Is. Neuze, ar brinsez fall, spontet, a glask pignat war marc'h Gralon. Met ruilhet eo en dour ha lonket eo gant ar mor evel Ker-Is, kollet ganti.



Klask a raen gwelet petra e oa deuet ar Rouz koz Gralon da veza. Met ar mor a oa tec'het, hag en e lec'h e oa eur lanneg.

Eun emgann vras a zo breman. Eur soudard gloazet a lavar d'in ar pezh a dremen :

— Ar mestr breizat Nominoe a ra brezel da impalaer ar Franked, Charlez ar Moal.

Neuze em eus plijadur o sellet ouz an emgann. A greiz holl, evel eur gurun, an Nominoe a ya d'an daou lamm ruz wardu ar Moalig...

Ha badaboum ! diskaret eo henmañ diouz e varc'h.

Kleze dir ar Breizad a ra aon d'ezañ ha dilezel a ra ar stourm.

Ar Breizad en deus gounezet an emgann ! Neuze eur youc'hadenn laouen a dregern war al lanneg : Nominoe, oe ! oe !




Emaoun goude, en eun iliz sklerijennet ha fichet kaer. Nag a dud, nag a dud a zo bodet enni. Anez eun aotrou bras hag am lakeas war e skoaz, n'em bije gwelet netra.

Evelse e oa aes d'in gwelout Nominoe daoulinet dirak an aoter, eur vantell hir erminiget war e gein. En e gichen, eur manac'h, e vignon an abad sant Konwoion.

An Aotrou 'n Eskop a lak war benn Mestr ar Vretoned eur gurunenn aour, roet gant an Tad Santel ar Pab. Raktal, ar vrezelourien a zav o c'hleze! an trompilhous a dregern.

Nominoe a zo sakret Roue Breiz.

Pegen kaer e oa da welet, re gaer ivez rak...



...Warlerc'h ar c'hleier laouen, e zon
kloc'h an tan-gwall.

Ding ! ding ! dong ! dong ! Pennfollet oun.

Tud a dec'h gant pakadou, chatal...
Lavaret e vefe repuidi !

Menec'h a dremen gant relegou sent, evel
er prosesionou, met ne ganont ket. Gouela a
reont.

Eur c'houer a hop warnoun :

— Arabad d'it chom aze, paourkêzig.
Al laeron-vor a zo er vro. E. rankomp
tec'het, tec'het pell ac'han !

Hag e welan listri an Normaned o tostaat
ouz an aod. Tec'het a reomp, koz ha
yaouank, pinvidik ha paour, en eur lezel
war hor lerc'h hor Breizig paour.



Tan! tan! dir o dir, dir o dir ha tan!...

Eur brezelour yaouank ha kalonek, kreñv
evel eul leon a zo erru.

E gleze a denn luc'hed.

Skei, skei a ra a bep tu. An Normaned
a zo laket lamm, ha taolet er mor.

An den kadarn-se hag en deus kaset kuit
an enebour, eo Alan Varvek.

Degouezet eo ar priñs e iliz-veur an
Naoned diskaret, hag eno, e lavar mil
bennoz d'an Aotrou Doue da veza roet
d'ezan an trec'h.

— Meuleudi, meuleudi d'ar priñs Alan,
a youc'h ar Vretoned laouen.

Hag ar venec'h a gan an Alleluia, en o
abati adsavet, rak Breiz a zo beo a nevez.



Souden, noz eo evel en eur pod. Aon
am eus, hag e krenan en eur glevet eur
youc'hadenn truezus :

— Truez, truez, n'am lazit ket.


Petra a zo eta, va Doue? War ar ster,
kaout a ra d'in gwelet, en eur vag, eun den
o skei eur paotrig gant eur c'hleze.

Strafuilhet, ez an d'en em guzat en eur
c'horn teñval, gant aon da veza gwelet.

An den drouk a dremen ebiou d'in hag e
lavar en eur c'hoarzin evel eun diaoul :

— Setu me disammet pelloc'h eus an
Arzur-se. D'in-me breman tron Breiz, a! a!
a!...

An torfetour ! Yann-Dizouar eo ! Lazet en
deus ar prins bihan Arzur, duk Breiz.



An heol a zav a-nevez! An evned a richan er gwez. Met skuiz oun gant an noz spontus-se.

Du-hont e welan eur maner. Marteze e vezo roet d'in eun tamm bara rak naon du em eus. Degouezout a ran d'ar poent mat.

Rak eun den madelezes meurbet, heñvel ouz an Aotrou Person, a zo war dreuzou an nor. Rei a ra bara ha soubenn d'eun toullad tudou keiz bodet en dro d'ezañ.

— An Aotrou Erwan a Gervarzin eo, a lavar d'in eur paourkez den mac'hagnet, harpet war e flac'hiou. Hon tad eo! hon diwaller!... Hag an holl a gan evit truga-rekaat o madoberour :

« Nann, n'eus ket e Breiz, nann n'eus ket unan!

« Nann n'eus ket eur sant evel sant Erwan.



Al lestr kaer, heñvel ouz eun alarc'h, a
red war ar mor glaz.

Tud a zo war an aod ker stank ha merien
war o c'hrugell.

Neventi vat d'ar Vretoned!

Pobl Breiz eo a zo aze hag a youc'h gant
levenez en eur saludi al lestr gwenn-kann :

« Digoueeet an Aotrou Yann en dro.


« Digoueeet eo da ziwall e vro. »

Ya! distro eo an Duk Yann Pevar,
galvet gant e Vretoned evit savetei frankizou
e vro.

Ar c'hleier a gan laouen, kant leo tro
war dro e pep ker.

Eur marc'heg, kaer gant e zilhad-houarn
a lavar d'in, lorc'h ennan :

— Paotrig, unan eus kaera derveziou Breiz
eo an deiz-mañ.



Setu me goudeze en em gavet e Roazon,
ker-benn Breiz. Er straedou n'eus nemet
bleuniou, bannielou, garlanteziou...


Sonerien trompilhous a zegouez ha d'o
heul e welan renkennadous marc'heien,
floc'hed, dougerien bannielou, intronezed, war
varc'h.

Ha setu goude, tri brins bihan, dilhad
seiz ha voulouz ganto. Pegen drant int!
Met an holl a zell kentoc'h ouz an hini a zo
e kreiz, war e bern eur gurunenn aour.

Eun intron gaer a zo en e gichen : lavaret
eo d'in eo e vamm.

Neuze eur youc'hadenn a darz :

« Nouel! nouel! buhez hir da Yann
Pemp, hon duk muia karet!! »



An amzer a dremen buan en huñvreou.

War eun hent bras emañ breman ha degouezout a ra ganen, gwazed, merc'hed, bugale, gwisket kaer evel ma 'z afent d'ar Pardon.

— Mont a reomp da zegemeret an Intron Anna, hon Dukez ha Rouanez, deuet da bardona d'ar Follgoad, eme d'in eur paotr yaouank.

Ha gwir eo. Nebeut amzer goude, em eus al levenez vras hag an enor da saludi Anna Vreiz, hag a zoug boutou koad evel va re.

Mousc'hoarzin a ra d'an holl ha dreist holl d'ar vugale. Neuze, me, laouen a gan :

— Bevet an Dukez Anna, bevet Breiz !



Hag e tihunan !...

— Graet az peus aze eun hunvre kaer,
eme d'in Mammig. Kont hen d'az mignoned
evit ma karint ivez o Breiz evel eur vamm
all.

Ha setu ! Ganen, c'houi lavaro va
mignoned, a greiz kalon :

O Breiz ma Bro, me gar ma Bro !

TOUTOUIG





